


# bremañ

Liseidi DAZONT o vanifestiñ enep d'ar brezel



Ur sell elzasat war ar brezhoneg

Ul lenner feal on eus ar gazetenn BREMAÑ hag eus kement levri pe skrid savet e brezhoneg. Va lennadennou kaerañ ez int. Abaoe tregont vloaz bennak e tarempradenn Breizh hag hec'h annezid, hogen gwañ-chalet on er vat o welout ar brezhoneg o vont da get. Ken chalet all on ivez o klevout Breizhiz o klemm war an niver ne vras a rannyezhioù disheñvel a vez komzet e lec'h-mañ-lec'h e Breizh-Izel.

Pebezh eurvat pa vefe deuet ar c'hallaoued gant o galleg evit reiñ tu da leoniz da gompen o c'henvroid ar gemvez ! Va zigarezit ma ran goap met ma c'halon hel lavar : divechiañ a ran va c'halon.

N'emaomp ket e bro Nijer gant he meuriadoù memestra ! Chomomp poellek, hogen un tamm ne vras a wirionez a zo ganin siwazh. Gwelout da skouer ar pennad-skrid bet embannet e niverenn 109 Bremañ ha savet gant Per al Lez. Evel ma ouzit n'eo ket ar wech kentañ e sav tabut diwar ar gudenn-mañ ha peurvuiañ da vare embannadur levr-mañ-levr ne zoj ket e zoare-skrivañ ouz an hini implijet peurvuiañ hiriv gant an holl ha dreist-holl gant ar skolioù.

Klevit an Elzasad Kozh : anañ e bro Elzas ne gomzomp ket an hevelep rannyezh kennebeut e pep lec'h. Tud departamant ar Rhein-Izel a gomz kentoc'h ur rannyezh a tenn ouz ar frankeg padal e tenn ouz an alamaneg rannyezh departamant ar Rhein-Uhel. N'eus kudenn ebet avat evidomp d'an em gompen kenetrezoimp. Ha pa vezomp bodet asamblez n'eo ket galleg a gomzomp : pep hini a zigore zivskouarn a youl vat evit selou an eil pe egile. Kement-mañ a zo disheñvel avat gant tud hanternoz bro Alamagn. Hon alamaneg kompez deomp-ni ne vez ket meizet du-hont. An dud-se a zo hor "gwenediz" deomp-ni ha ne gomprempomp ket anezho koulz lavaret 'n holl.

Martin Luther (1483-1546) eo an hini on doa diazezet an Alamaneg-Uhel, yezh arnevez ar pobloù germanek. Dre ar yezh-se e c'hall un Elzasad mont e darempred gant ar broioù Alaman (16 bro : RFA ha RDA kozh en holl re-se e komzer ur rannyezh er gêr, Aostria, Helvetia, Luxembourg ha Lichtenstein). Hor yezh unvan eo an Alamaneg-Uhel. Anat eo neuze e vezomp atav hon-unan "Gwenedour" d'unan bennak all. Hogen a-drugarez d'an alamaneg-uhel, kelenet ha desket er skolioù hag implijet gant ar c'haiz eus an dud e c'hellomp em gompen pa ne c'hellomp ket hen ober gant hor rannyezh.

En em c'houlenn a ran peseurt politikerezh a-fed yezh a vez kaset war-raok ganeoc'h, Kelted Kozh ? Daoust ha tabulat a reoc'h betek ma vo

aet ar brezhoneg war e dalaroù. Poent bras eo ober arsav brezel etre brezhonegerien ha labourat start evel ma ra Diwan. An ober gwirion a zo ganto : kelenn brezhoneg unvan er skolioù, krediñ a ran start en dra-se, hep koll hor rannyezhioù diniver, pinvidik ha kaer. Flour eo komz brezhoneg !

Distroomp da beuriñ war hon niverenn 109 eus Bremañ. Perak ne rit ket gant ar brezhoneg unvan evit sevel panelioù hag all ? Biskoazh kement all ! Ne gomprempomp ket an troidigezhioù implijet evit lavarout "rectangulaire". N'eo na "skouergornek" na "reizhokogn", hogen "Hirgarzekek". A-du on gant Per al Lez. Bez' ez eus ezhomm d'ober gant ar brezhoneg unvan e pep lec'h ha ne skrivan ket n'eus forzh penaos. N'hoc'h ket hoc'h unvan bretoned och ober gant ar brezhoneg dre ar bed holl. (Pet omp em diavaez Breizh o c'houtout brezhoneg ? Sed aze ur goulenno poellek n'eo ket 'ta ?) Brezhonegerien a-ziavaez bro o deus ezhomm da gompen ho yezh hep kavout ezhomm d'ober gant geriadur rannyezh-mañ-rannyezh.

Kompen a ran mat ar ger "monument" dre ma 'z eo elzasek ivez. Gant kalz a anvioù-kêr hag anvioù-lec'h elzasek em eus kejet a-dreuz va lennadennoù brezhonek. Anvioù-lec'h brezhonek all 'm eus kavet o pourmen dre an Afrika. Danvez a-walc'h int evit ur pennad-skrid all, hag evit kenderc'hel war an hent-se mar kav d'al lennerien ha da vBremañ eo dudus an dra-se.

Soñjal a ra din ez eoañ brezhoneg hag an elzasek yezhoù kar un tamm mat. Evit echuiñ, komzomp diwar-benn Gwenediz. Soñjal a ra din ez eo ar re-se galaned diwezhañ ar c'hwec'hkom. Stourmet hag en em gannet o deus a-enep Julius Kaerzar padal ar ouenn KLT ne vije ket en em gavet e Breizh namet tro ar pevare kanved goudo J.K. Doujañs bras a rankomp kaout ouz ar galaned-se. Abaoe pell emañ ar c'hallaoued och ober lurchadennoù diwar-benn ar sevenadur galian diouz un tu ha diouz un tu all e vrasont ar sevenadur keliek diwezhañ. Perak ne gemeromp ket Brigitte Bardot evit saveteiñ an elzasegerien hag ar vrezhonegerien a-vremañ diouz ar steuzidigezh. Marteze hon dije muioc'h a chañs ganti eget gant Fañch Mit.

Heugus eo oberenn ar c'hallaoued e-keñver pobloù minorrelaet ar c'hwec'hkom. Mat-kenañ omp bet a-viskoazh da vont da verel evit ar "Vro" met keit ha ma 'z omp bev n'o deus doujañs ebet evit hor yezh hag hor sevenadur.

Gill ar Frank (68 - Guennehem)

Gouel broadel ar Brezhoneg 17.18.19/05/91 Karaez

Keneiled Ker, Kavout a reoc'h amañ kevret ma chekennadkoumanant. Plijet on bet o larn, en niverennoù diwezhañ, ar rummad pennadoù a-zivout an islandeg kinniget gant Jil Ewan. P'emeur o klask skarzhañ eus hor yezh gerioù ken brav, ken aes ha degemeret abaoe pell zo evel douaronezh pe jedoniezh, bet lakaet en o lec'h gerioù euzhus (sellet ouz embannadurioù 'Eil Derezh DIWAN) ez eus peadra da vezañ frealzet pa weler hevelep pennadoù embannet gant Bremañ. Gouzout a ran er vat e vo lavaret din n'eo ket aze emañ an dalc'h p'emañ ar yezh o vont war c'hallakaat en he erredurezh hag ha distagadur. Re wir eo met war-raok e rankomp mont bepred ha n'eo ket i-wag' war dachenn ar gerioù. Tugarez eta da Jil Ewan evit bezañ roet deomp da anavezout gwelloc'h skwer an islandeg. A wir galon ganeoc'h

Gwenael Emelyañ.

† KANV

Aet eo da anaon e fin miz Genver ur liron a Rohan-Chabot.

-stourmet arza a-viskoazh - roet he deus he nerzh hag hec'h amzer d'he bro ha d'he yezh. Skoazellet he deus bemdez-Doue he chanvroid evit ur bennozh-Doue.

Anavezet mat e oa evit he brokusted, skoazellet a roe da stourmoù liesseurt he bro. Mout a rae ingal gant he bugale da gamp KEAV er bloavezhioù 60. Koumanantet e oa d'hor c'hazetenn dibaoe an niv. 0. Lojet e oa bet burevioù SAE ha Bremañ e salioù prestet ganti e-pad un nebeut bloavezhioù, 30 leurgêr al lisoù e Roazhon.

Skipailh Bremañ ha burev SAE a gas o gourc'hemennoù a gengañ d'he bugale ha bugale vihan.

Gill ar Frank (68 - Guennehem)

Pennad gortozet ...

E miz Here e oa bet kelenet ganeoc'h e vefe dalc'het kendiviz an A.P.E.E.B / F.I.A.R.E.P d'ar 27/28 e Douarnenez, en ur embann program an daou zevezh-se en e bezh. Siwazh n'o deus ket bet ho lennerien ar genlabourer ar gelaouenn, ha dreist-holl daoust ma oa bet kaset deoc'h ur rentañ-kont (gant fotoioù ouzhpenn evel ma c'houlennit !).

Evel-just ec'h ouzon er vat e tle bezañ dibabet etre ar pennadoù kaset ha gwelloc'h-se ma vez an dibab d'ober ; met lennet am eus en div niverenn diwezhañ ar gazetenn pennadoù a vefe bet tu da lenn kenkoulz e miz Gwener pe C'hwevrer 1991, ar pezh n'eo ket gwir evel-just evit an destenn bet skrivet deoc'h. Lennet 'm eus ivez e fell da v-Bremañ bezañ tost ouz darvoudoù a c'hoarvez e Breizh, astenn tachenn ar gazetenn ha kresk niver ar goumananterien. Perak eta ho peus c'hwilet war an taol-se ?

gwelloc'h labour gant kazetennañ pemdeziek evel Ouest-France hag an Telegramme, gant an eil eget eben dreist-holl.

Kement hag ober, ha peogwir ne dapan ket krog em fluenn alies, er mare-mañ, e fell din reiñ an dra-mañ da c'houtout d'ho lennerien ivez. Tennet e vez a-wec'hoù, ha klevet aliesoc'h, e vez sach-blev pe enebiezh, etre ar c'hlasoù diyezhek publik hag ar Skolioù DIWAN. N'eo ket un alor a c'hell bezañ studiet na disklennet kan buan ha tra gant frazannoù berr disklennet d'ar



Perzhidi ar kendiviz e Douarnenez d'ar Sadorn 27 a viz Here

Rak memestra, ne c'hoarvez ket bemdez, na bep miz na bep bloaz zoken e vefe bodet Aotrounez evel COZAN, TREMEL, DOLLO, MAZEAS, LE TREUT, MAILLS (Rektor an Akademiezh) dirak un tri c'hanlennadur ar yezh ! Ne vez ket gwelet bemdez kennebeut Sloveniz, Sorabed, Euskantz, Kembreiz, Iwerzhoniz, Okitaniz, Katalaniz, Elzasaniz, Arabed ha Breizhiz o ar badagogiezh, stummadur ar skolarien, ar gwir hag ar skol... publik ! hag all...

Peadra a oa da sevel meur a bennad zoken, pa ne vefe bet nemet evit skrivañ ne oa ket peurvaizh pep tra evel-just e doug an emvod. Evit ar wech eo bet gant

kendiviz

Frañs warlec'hlet

"Huellet eo bet pevare kendiviz ar F.I.A.R.E.P. azotet e Douarnenez d'ar 27 ha 28 a viz Here gant an A.P.E.E.B., gant 300 den, 40 a-ziavaez Breizh en o zouez.

Tizhet eo bet ar palioù bet roet d'an emvod-se :

- Diskouez perzhioù mat ar c'hlasoù diyezhek a ya en dro ar skolioù publik e Breizh, e bro-Euskadi, e Okitania, hag hez ar skolioù da sevel anezho e Korsika, en Alzas, ha Katalonia.
- Lakaat war-wel stad disheñvel ar stummadur er skolioù normal hiriv e pep rannvro, hag an ezhomm da stummañ skolarien diyezhek evit respont da goulennoù ar lamhoù.
- Diskouez pegen war-lec'hlet eo Frañs e-keñver brooù all Europa ; tall evit e Sloveniz, bro Alamagn (Sorabed), Bro Gembre hag Iwerzhon, ar pezh a vo sklaeroc'h c'hoazh goudo 1992.

D'ar Sadorn 27/10 a oa bet bodet en-dro d'ar mikro, rektor an Akademiezh, tri gannad (an Ao. Dollo, Cozan ha Tremel), all prezidant ar Rannvro (an Ao. Le Treut), ha maer Douarnenez (an Ao. Mazeas), asamblez gant kareñt an A.P.E.E.B. ha kelennerien U.G.B. dirak ur sal leun-choak.

Gant ar rektor eo bet lavaret e vo skignet ar skolioù dizale paperoù kelaouñ diwar-benn an doareoù da zeskñiñ yezh ar vro, hag e vo plouret war stummadur ar skolarien en I.U.F.M. da zont.

Diskouezet an deus an diviz-se e chom labour war ar stern evit astenn tachenn ar brezhoneg er skolioù publik ; evit an holl eo bet disklennet e oa pouezus. Daoust hag-eh e c'hell ur c'hanlabour padus bezañ savet avit-se ? Daoust hag-eh e vo savet ur bodad-labour gant diennid Vreizh evit heñval ar pezh a vez graet gant an Deskadurezh-stad ?

APEEB

J.Y. Broudig

Degaset gant Saddam Hussein a aloubas Koweit e miz Eost tremenet evit adleuniañ e gelioù goulo goud e ar brezel enep da Iran ha kaout un dachenn digor war Pleg-mor Persia.

C'hoantaet gant ar re, er Stadoù Unanet hag en Europa ivez, a fell dezhe bezañ mestr ar bed, evel e mare an trevedennoù hep soursial ouzh riskloù denel, ekonomikel hag ekolohel ur seurt emgann.

Ar brezel-se n'eo ket diouzh c'hoant ar pobloù. Diouzh hini un diktator eo en doa gazet ar Gured hag ivez diouzh hini ar galloudoù eoul-mein ne welont nemet o interestoù a verr dermen.

Diouzh un tu all, nac'h ar brezel zo evidomp hetin e vefe renket ar c'hudennoù liammet gant aloubidigezh ha gwaskerezh ar pobloù er bed.

Gwir eo e implij Saddam Hussein kudenn Palestina evit abegin aloubadeg Koweit ; ken gwir all eo e rank Israel mont kuit eus douaroù aloubet gantañ hag asantiñ da stad Balestina.

Plegoù ken fall zo. Gwaskerezh arme ruz URSS er broioù Balt, aloubidigezh Tibet gant Sina, soudarded USA e Panama, arme saoz en Iwerzhon ...

Ha tostoc'h ouzhipm, na zisoñjomp ket ar riskloù zo gant arme Gall e Breizh, gant he c'hampoù, he c'hazarnioù ha dreist-holl he diazez nukleel en Enez Hir. C'hoantaet ar peoc'h da vat zo ivez goulenn groñs ez ale kuit arme Gall eus Breizh.

Nac'h a reomp ar brezel-se, n'eo ket hon hini, met hini marc'hadourien armoù (Stad C'Hall hag URSS) hag ar varc'hadourien eoul-mein. Ni, Bretoned, a oar re vat petra eo ar brezel pa omp bet kaset c'hoazh gant Stad c'Hall da vont lazhet. Nann, n'ez aimp ket d'ar brezel, na d'ar pleg-mor, na da lec'h all.

"EMGANN enep da brezel an eoul-mein" Kemennadenn EMGANN miz Genver 1991

Kemennadenn

Tra m'en deus lazhet lu an U.R.S.S. e Lituania hag e Latvia, e tamall POBL an argadeg ouzh republikoù ar broioù-se gant an Unvaniezh Soviedel, evel m'en doa kondaonet aloubidigezh ar C'Huweit gant an Irak. Tamall a ra ivez tav kenvuntrer ha kenwaller ar Stadoù Unanet, hini Bro-Saoz kement hag hini Bro-C'Hall war an darvoudoù-se.


Sevel a ra POBL a-enep emzalc'h ar stadoù-se hag a gas, dindan digarez toull ar Gwir etrevroadel, ur brezel er "Pleg-Mor", tra ma lez digor-frank an hent da Gorbachev er broioù Balt, evel m'o doa lezet Siria da aloubiñ al Liban, Israel da zerc'hel dindan he beli Sisjordania pe wask Sina war Vro-Dibet ... h.a.

Gwir eo n'eus netra da c'hortoz eus broioù evel bro-C'Hall pe

- Liseaned Dazont -



3000 e camp e Roazhon o vanifestiñ enep d'ar brezel. Galvet o doa liseaned Dazont da zont da vanifestiñ d'an deiz-se gant ar strolladoù all. E Brezhoneg o deus youc'hat o fulor "NANN D'AR BREZEL" "NE VARVIMP KET EVIT PETROL". Tud all zo deuet da youc'hal asambles ganto e Brezhoneg ha merzet mat int bet en engroez !



Vro-Saoz hag a ra fae, abaoe kantvedoù, war bobloù evel er Iwerzhon, Kembre, Alba, Euskadi pe vreizh ...

- Setu perak :
  - e nac'h POBL mont d'an nerzh evit dirouestañ dizemglevioù etre ar pobloù, forzh pelec'h vefe.
  - e c'houlenn POBL digant ar Gumuniezh Etrevroadel e vefe anavezet ent kefridiel gouarnamantoù Lituania, Latvia hag Estonia hag e vefe kemeret diarbennoù, na vefent ket ar brezel, a-enep U.R.S.S., evel he deus bet graet a-enep an Irak.
  - E ro harp ha mignoniezh ar vrogerourien vreizhat da vrogerourien ar Broioù Balt o stourm evit o frankiz.

A-berzh kuzul-ren POBL : Yann Duchat

GWASKEREZH HA MUNTREZEZH

Daoust ma 'z eo alouberezh ar C'Howeit un torfed a-enep da gwiroù ar pobloù, ha daoust ma 'z eo bet graet gant un diktator euzus ; stadoù all o deus graet ken gwazh ! rak pobloù all ; reoù Palestin, Liban, Kurdistan a zo bet gwasket memes mod.

Adalek ar penn kentañ e oa anat ne oa ket evit difenn gwiroù ur bobl hepken o Parak kemmet e nerzh a daol trumm, evit difenn gwiroù ur bobl, (biken n'eus bet en istor, un emgann kirri-nij evel an hini kaset a-enep da vro Irak) pa ouezer emañ Pinochet o vevañ sioul e Santiago e bro Chili, pa ouezer emañ tankoù Gorbachev o vont-tre disourti e Bro-Lituania, pa anavezet niver an diktatorien en Afrika. P'emañ bro-Liban war e dremenvan hag ar Palestiniz "bauzet" dindan diskoùmoù kinniget gant an ONU ...?

SURENTEZ DA GENTAR  
Parak n'eo ket bet kendalc'het gant ar "bloecus" betek ma vefe dauet da vezañ bet ledet d'an holl vroioù renet gant an diktatoriezh ? N'int ket bet graet a-enep pep gwaskerezh sevenet abaoe an 2 a viz Eost ? Proseziou ar bro-Sina da skouer.

Armeoù ar broioù pinvidik a zo aet da vrezeliñ evit abegoù surentez, surentez ar petroli evit ar broioù pinvidik, ha surentez politikel evit ar broioù tro-war-dro. Ha pa weler eus ar Maghreb betek bro-Jordania ar pobloù o sevel a-du gant un den evel Saddam Hussein, pobloù hag a zo prest da lakaat o spi, o zonkadur etre daouarn un diktator ken spontus, neuze, tu 'zo d'an em c'houlenn na pegan don e tie bezañ d'hoanag ar bed arab. Eskinet vez ouzhpenn-se an arabiz staliet er broioù

galloudus ; lakaat int kiriek d'ar pezh a c'hoarvez er golf ; dismegañs gwernelouriezh a dleont gouzhañ muoc'h-mui, pa ne vezont ket skarzhet eus ar vro evit "abegoù diresis".

DANJER AR MEDIA


Petra c'hoarvez warc'hoazh ? Netra vat, gwelet e vez o tiwanañ ur seurt psikoz er bed a-bezh, maget dre an tele, benveg diktator ma vez unan. Dañjerioù all a zo : seurt darvoudoù ne c'hellont nemet kreskiñ niver an arabiz o vont war-du un emsav rollijel taeroc'h taerañ hag a lakaio an demokrateliezh da gliañ, netra evit dan ; daeloù o skilhañ, gwad o liverañ ... hag evit disoc'h : distruj ha dismantr, ha netra ken. ■

Barbra Kerien



Dall ! Krog eo ar brezel ! Daoust da holl vanifestadegoù ha pedennoù ar bed en deus lakaet ar "Gwir Etrevroadel" e fuzuilh e bant c'hoazh. Ha disklariañ brezel d'ur bobl renet gant un diktator eo lakaet ar Gwir Etrevroadel da vont doujet ? Sofijet en deus an diktator-se degas pinvidigezhioù d'e vro diwar-goust frankiz e amezelien, gwir eo. Ha dre-se e vo lazhet gwazed ha maouezed na ouzont -pe na c'hallont- nemet sentiñ d'o rener ?

Nannasañtin



d'en em ren o-unan" : an darn vrasañ eus an dud -er Stadoù Unanet kement hag e Stad-C'Hall- zo a-enep d'ar brezel : skouerioù brav a zemkratelezh !

Petra ober neuze ? N'heller ket asantiñ da be aloubidigezh bennak e ve ! Lavaret em eus c'hoazh ez eo ober fae war vuhez ha frankiz un den e lazhañ kement hag ez eo ober fae war vuhez ur vroad hec'h aloubiñ. Kredif start a ran eo an doareoù habask eo ar re darvoudus, ar re wirion nemeto. Pazh zo trist eo ne ziskouezont ket ar "broioù demokratel" kredif anne. Sina, goude "Navez-Amzer Beijing", hag URSS, o klask kontrolliñ ar Republikoù adarre, a anav entmar ha laoskentez ar "Broioù Diorroet" pa ziskouezont kamer divizoù habask evel ar gronnadur pe ar c'hastizadennoù armerzhel. Armoù ar re laosk hepken eo ar brezel hag ar muntr. ■

Yann-Varc'h Thorel



Deskadurezh

BREIZH, KORSIKA : MEMES STOURM ?

Gouzout a ouzon e vo tud direnket gant ar goulen-mañ : perak o deus Korsiz kalz muioc'h a wrioù egedomp ? Ha ne servij da netra ar stourm kuzh, n'eo ket sur ? Jean-Yves COZAN en deus komprenet an dra-se o larout : "ar pezh a zo mat evit Korsika, perak n'eo ket gwir evit Breizh ? Me a lâre e vez brudet an dud d'ar feulster war an dachenn ensavadurel".

Ne cheñcho netra kaout daou bost ouzhpenn evit ar c'h-CAPEs. Ret e vo gouñt ur stadud nevez evit Breizh. Gant ar stadud-se e c'hallimp implij hon-unan ar skolaerien hag ar gelennerien. Abaoe dek vloaz ne vez ket klevet kalz a drouz en nozioù e Breizh. Mat perak ne vez ket doujet gwirioù pobl vreizh evel re pobl Gorsika ?

Jakez ar Fur

5VET SKOL-VEUR

Krouidigezh ur pemped Skol-Veur a vefe un dra vat hag un dra ret, a ziskler kuzul-ren strollad POBL (Strollad evit Aozad Breizh Dieub) bet bodet e Pondivi, dre ma 'z eus dija, Naoned en o zouez, peder anezho e Breizh.

Lod ar C'huzul-Rannvro eo kinnig al lec'h, hogen, heliñ a ra POBL e vefe dibabet departamant ar Morbihan (Bro-Gwened), pe Wened, An Oriant, pe Bondivi e vefe, evit reiñ lañs da zioroadur kreiz-Breizh.

Goulen a ra POBL, ouzhpenn da se, e vo a-wel, er skol-veur nevez-mañ, krouidigezh ur gevrenn c'houestlet d'ar sevenadur breizhek ha keltiek.

Advenegiñ a ra POBL ar c'hinnig en deus graet meur a wech dija, en e lavrig-diazezh "Evit ur werinelezh vreizhat", nevez embannet, da skouer, da larout eo, krouidigezh ur c'huzul ar Skolioù-Meur e Breizh, gouest da beurreizhañ ha da genurzhiañ ateriou ar skolioù-meur e Breizh a-bezh, Liger Atlantel (Bro-Naoned ha Bro-Wennan) en he zouez, evel just.

A-berzh kuzul-ren POBL, Yann Duchet

JOSPIN A BLED GANT AR YEZHOU

Tra m'emañ ar Vretoned o klemm dre ma ne fell ket d'an Deskadurezh-Stad pladif gant ur gwir bolitikerzh diorren ar c'helenn brezhoneg emañ ar ministr Jospin o'ch ober war-dro kelenn ar yezhoù da vugale ar familhoù o tont eus Aljeria, Spagn, Italia, Marokko, Portugal, Tunizia, Turki.

D'ar Merc'her 23 a viz Genver e lavare an Aotrou Joel Le Treut, bisprezidant ar C'huzul-Rannvro (ha prezidant bodad ar sevenadur) e oa "afar ar Rectoriezh ar c'helenn Brezhoneg". Ha kredin a ra dezhañ e vo difennet hon yezh gant nevel Jospin ma ne vez ket graet gant dilennid ar Vretoned ?

M.K.



Aloubet o deus studierien ar Gevern Galliek burevioù Rektordi Roazhon e-pad meur a eurvezh, d'ar 17 a viz Genver 91. 50 e oant daot d'an deiz-se, da ziskouez o fulor ha da c'houlenn bezañ degemeret gant Rector Akademiezh Roazhon. Setu emañ da heul komzoù dileurid Unvaniezh Studierien Breizh : "Goulen a raomp grañs postoù CAPES e Breizh. Goap 'vez graet ouzhip I Trawalc'h eo I Ret eo deomp kaout ur rouedad kelenn dereat en hor bro, adalek ar skol-vamm betek ar skol-veur. Ur post hepken evit ar C'HAPES zo kunuzjennin ac'hanomp !".

A-raok kuitaat sal-degemer ar Rektordi eo deuet a-benn studierien DAZONT da gaout un emgav evit fin ar miz gant ar Rector .

Bremañ



Plakenoù aluminiom aozet evit bezañ paget war an norioù, ha reoù all pleget e doare da vezañ lakaet war an taolioù-degemer e-barzh an tiez-post, ar bankoù, ar servijoù boutin, ar c'henwerzhioù h.a., a zo bet lakaet e gwerzh adalek ar 1/2/91. Reiñ da c'houzout d'ar weladenourien e c'heller komz brezhoneg eo o fal. Priz ar blakenn : 50 Gantañ dija e oa bet savet ar gelaouenn divyezhek "Evid ar brezhoneg" 17 vloaz 'zo. Kelou a zo mod-all e c'halle "Evit ar Brezhoneg" bezañ embannet en-dro, a-raok peñs, gant ur skipailh nevez.

Kendivizout pe riotal

Manifestiñ war hentoù Breizh

"Ma yezh ha ma c'harr, war o goar" a c'halled kanañ disadorn 15 a viz Kerzu, war an hent etre Gwened hag an Alre, rak gorrek ez ae ar c'hirri, pa oa rei dezho heuliañ un 20 karrad tud deuet da vanifestiñ gant Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg evit goulen digant ar stad diorren kelenn ar brezhoneg en deskadurezh.

Pemzektez a-raok e oa bet degemeret Tugdual Kalvez, Yann-Glaod Morvan ha Jando Robin e Paris, gant Jean Hebrard, kargad-a-gefridi gant ar c'hentañ Ministr, ha kinniget dezhañ teuliañ UGB evit ma vefe roet da studiañ a-benn ar fin da Ministr an Deskadurezh na gav ket amzer da zegemer ar gelennerien vrezhoneg.

Sevel ur steuñv

En teulad-se e c'houlenn UGB ma vo kroget da stummañ skolaerien vrezhonek, ma vo kresket niver ar postoù er C'hapes (1 evit Breizh, 14 evit Korsika e 1991 !), ma vo savet ur c'huzul en deskadurezh evit kelenn ar brezhoneg er skolioù (gant gelennerien, familhoù, melestradurezh, h.a.).

Goulen a ra UGB ma vije boulc'het ur

gwir kendiviz etre an Deskadurezh-Stad hag ar gelennerien vrezhoneg evit sevel ur steuñv da gas war-raok ar c'halenn brezhoneg, sachet en abeg da youl fall tud ar galloud.

M. Kerrain

Amañ hag ahont

"Ha gouzout a rit e voe kinniget al-lezenn Deixonne (1951) (diwar-benn Kelenn ar yezhoù rannvroel, anezhi ur gwir gammed, gwall vihan dimp hiziv) gant ur c'hannad sokialour eus an Tarn, difenner bras ar chasourien, ha na oa ket gwall entanet gant an "trefodachoù"? Mat gant an degouezh hag ar politikerezh e voe graet anezhañ ur penn stourmer evit ar rannvroel, en desped dezhañ ha d'e jakobinelezh, rak ezhomm a oa eus ur sokialour bannak evit enebañ ouzh raktres ar Gomuñourion diwar-benn an hevelad danvez (raktres ar c'hannad breizhat P.Herve) hag eñ an hini e voe ar sokialour-se."

Gant Abell Treucan "Ocellana" n° 78, DU-KERZU 1990.



Harz-debriñ evit stummadur ar gelennerien

Degadoù a girri-tan o vont goustadik war ar gour-hent eus an Henbont (Mor-Bihan) betek An Oriant zo bet gwelad d'ar Sadorn 26 a viz Genver goude kreisteiz.

Eno e oa ur c'hant bennak a dud (eus korn An Oriant dreist-holl) o vanifestiñ evit ledanaat tachenn ar Brezhoneg en Deskadurezh Stad, dre stummadur ar skolaerien. Un nebeut dileuridi a oa bet degemeret gant an Aotrou Le Drian, maer ha kannañ Bro An Oriant. Ar vanisterien

o doa embannet o harp da Yannig Baron : hemañ en doa kroget un harz-debriñ ur sizhun a-raok, a-du gant goulennoù Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg hag ar gerent.

Klaod an Duigou

Pennad-imor

POBL AN EMSAV

An hunvre abaoe dek bloaz

Abaoe tri bloaz e vez pedet "pobl an emsav" da vanifestiñ gant kirri. Manifestadeg Roazhon warlene n'oa ket savet gant kirri hag e oa an hini wellañ e Breizh abaoe pell 'zo. Spontusoc'h spontusañ, petra 'm eus lennet hiziv ? Ur vanifestadeg aozet gant kirri c'hoazh !

Da gentañ on bet estonet gant an deiziad : ar 26 a viz Genver. Ned in ket manifestiñ etre an Henbont hag an Oriant. Perak ? Trist eo "pobl an emsav", me gav din. Skuizh on gant emzalc'h an emsav brezhoneg. Adsavet e vez ar bed dirak bannoù e-pad novezhioù hir. Mat e lec'hioù all pa zeu an noz, ar baotred a labour start. Amañ ul lodennig a soñj avit evit ar re all. Petra a soñj dezho ? Kaout un fannig prof digant Paris. Un huñvre ! Ober a ra goap ouzh hon yezh, stad c'hall penn da benn.

Abaoe dek vloaz e vez gwelad tud hegedrik o lavarout ar bedenn anavezet mat : "cheñch a ra an traoù gant ar PSF, ar gouarnamant...". Met ar gouarnamantoù a dremen ha pobl Vreizh a dosta bemeiz ouzh he bez. Ret e vo digeriñ ho taoulagad ? Petra hon eus gounezet e-keñver promesaoù graet gant Fañch Mitt hag e glan. Na c'hallimp ket kenderc'hel da c'hortoz ar promesaoù ha c'hoari e-giz bugale (pobl an emsav) dirak an Tad Nedelag (ar stad). Piv a c'helle reiñ d'hon pobl ur statud ofisiel evit he yezh ? NI HON-UNAN.

Ur bloaz nevez a grog. Sevel a ra troud ar brazal er bed pa skrivan an taol imor-mañ. Na zijijil ket eo un drempred eo ar politikerezh. Ouzhip e kavomp stad c'hall hag he mevelien feal.

N'eus forzh penaos ned in ket da vanifestiñ d'an Oriant peogwir eo deut amzer an oberennnoù a-bap seurt. Manifestiñ gant kirri ne cheñcho netra. Gwelat ! vo.

Jakez ar Fur

Tibet goude torradur al lezenn-vrezel

LHASA MOUGET

"Ul lezenn-vrezel hep he holl enselladennoù eo a zo o ren war Lhasa" eme un Tibetad. Torret e oa bet al lezenn-vrezel gant Beijing d'ar 1añ a viz Mae 1990. Ken stegn eo an aergelc'h ha ken mouget eo ker ha pa oa-hi o ren avat.

En em vodañ evit abegoù politikel pe relijiel, enebñ ouz ar sokialouriezh pe c'hoazh brouad an disrann, a zo berzel adarre gant ul lezenn bet embannet d'an 23 a viz Mae, teir sizhunvezh enta goude torradur al lezenn-vrezel. Ret eo d'an dud chom hep mont er-maez goude 11 eur noz ha prennañ pep dor. Ma n'asanter ket e c'heller bout kraouet a-benn bout "goulenataet". Embannet ez eus bet er skinnel e miz Gouhere e ranke ar bolis "klask pishoc'h roudoù an enebourien".

Dieubiñ" zo bet erlec'hlat war ar straedoù gant ar "Bolis Poblel", un adarme brudet evit bout digenurz. N'eo ket aet kuit "Lu Poblel an Dieubiñ" goude torradur al lezenn-vrezel avat. Emañ en Ti-Polis war blasenn an Jokhang a zo bet adsavet goude bout bet tanet gant Tibetiz e miz Here 87. Ha gouzout a ouzer ez eus un 50 000 bennak a soudarded e twardroioù Lhasa. Evel ma lavar ur c'hrennlavar tibetan: "Ur sinaad en ul lec'h, un degad war e lerch".

Yann-Varc'h THOREL
dirwar gelaier Tibet Information Network
Luchskouedennou Lungta.

War-lerc'h manifestadegoù an 8 a viz Even he deus lakaet ar bolis reolennoù strishoc'h war ar veajourien a vez ouan hag embannet groñs he deus e ranke an dud beajiñ a-strolladoù ha mont da gousket e "letioù ofisiel sinaal". Beajiñ e seurt strolladoù urzhiet a goust-etro kant dollar bamdez d'an den.

Hanter kant mil

Un archerdi nevez zo bet savet war Dekyi Lam (straed Beijing evit Sinaiz), pevar solieradur emañ hag ul leudoenn warnañ abenn gweliet holl ar banalloù ha savadurioù eus karterioù tibetan. Bez e c'hell bout betek pevar folis oc'h eveshiañ war an doenn-se. "Lu Poblel an



Ur soudard eus Sina o lakaat e graban war ur manach tibetan.

NUKLEEL ADARRE

D a vare gwalldaol Tchernobyl e 1986 e oa bet bro-Gorsika unan eus ar broioù a oa bet taget ar muiañ gant an skinoberiusted en Europa.

Ar Bodad Enklask ha Kelaouiñ Dizalc'h war ar Skinoberiusted (1) en deus embannet nevez 'zo e oa bet lieskementet dre dri ar c'hudennou yec'hed o tennañ d'an tiroid etre 1985 hag 1987 war an enezenn. Al loaned hag ar plant a zo bet taget ivez.

(1) Commission de Recherche et d'Information Indépendante sur la Radioactivité.

A-enep Europa
THATCHER KROG GANTI ADARRE

Kadorldez Strollad Bruge e vo an Itron Thatcher bremañ evit derc'hel da enebñ ouzh Europa gevredel. Ar strollad-mañ zo ur strollad prederiañ riezour ha dreist-frankour savet e Miz C'Hwever 1989 gant keredourien hag armezhourien a-zehou evit difenn Europa ar Riezou, ur c'hevredad dieub a stadoù mestrezed warne o-unan o virout pep a zoare diouti hec'h-unan, ha n'eo ket "gouarnamant kreiz-Europa".



Thatcher o paouez reiñ he diez. "Intruduioù kontrol broioù zo en Europa davet Irak zo kement a brouennoù n'eo ket graet unvaniezh Europa" eme P. Robertson, sekretour ar gevredigezh.

Maeroniezh an Itron Thatcher a ranke degas muioch a argant d'ar stourm a-enep da gargidi Vrusel. En aner betek-henn em deus klasket ar strollad mont e darempred gant strolladoù eus ar c'havandir.

Y.V.T.

Korsika

Un enezenn kollet er rugenn Stad C'Hall o yudal

Youl FLNC da zigeriñ stourm pobl Korsika zo stanket gant ul lodenn emsaverien o deus divizet adkregiñ gant ar stourm armet. Un efed eus an torr-mañ eo an tarzhadennoù diwezhan. Kudenn pobl Korsika n'eo ket ur goullenn kerkeret ur statud ispisial evit Breizh. Unvaniezh Stad-C'Hall zo o tarzhan. Ne c'hell ket kenderc'hel keit-all kaout div bolitikezh evit he minorezhioù broadel.

War leurenn Bro-Gorsika eo degouezhet FLNC "istorel" gant an tarzhadennoù pouezus graet e miz Genver 91. Abaoe ar 25vet a viz Du, en deus FLNC daou benn. An noz-se, ouzhpenn pevar c'hant paotr armet ha koupolet a oa en em gavet e Vorgo, ul lec'h m'he doa gounezet arme Pasquale Paoli ouzh soudarded ar gail, Marbeuf.



E-pad an emvod kelaouiñ-se e oa touet an torr gant renerien FLNC lakaet da "deknokratourien ar stourm". Lavaret en deus FLNC "istorel" adkregiñ gant ar stourm "politikel-soudardel". Diskouez a rae e vo anavezet he oberennou brezel gant ar "c'hanol istorel". Adkemeret he deus arouez kentañ an aozadur a oa bet dilezet gant ar "c'hanol a-gustum".

Ur vare displann

Bez emañ an enkadenn abaoe an arsav doujet goude advotadeg Fañch Mit. Daou vloaz hir, sioul mat efed abet. Fuloret ha dihabask eo ar stourmerien muioch-muiañ. E kouls an arsav eo bet skignet a pep lec'h gant FLNC he raktres evit ur gevredigezh nevez war an enezenn. Manifestiñ a rae e Corti -devezhioù etrevroadel, he youl da vont davet an holl aozadurioù a glask un arakadenn evit an enezenn. Re zo re evit ul lodenn a stourmerien. Kregiñ a ra ar stourm etre ar "re bolitikel" hag ar "re soudardel".

Ar re gentañ a oa an niver muiañ e penn FLNC hag e-barz A CUNCOLTA. Na fell ket dezho tarzhadennoù ouzh an dud e-giz

gwechall. Mennout a reont ledanaat ar stourm gant ar bobl. Na fell ket dezho kavout ur strollad hepken. Genvel a reont an dud kaozeal war he raktres kevredigezh. Setu ar pezh a oa bet lavaret e-kerz an emvod kelaouiñ dalc'h et an 19 a viz gwengolo e-kichen Aiaccio. Anavezout a rae FLNC e oa kudennou diabarzh.

Met e-pad an amzer-se strolladoù zo bet savet. Tarzhan a ra savadurioù evit an douristed. ALNG ha goude Resistenza a stourm ouzh ar "speculation immobiliere" graet war o douar. Deus pelec'h emaint o tont ? Diouz FLNC kazi sur rak ne fell ket dezho asantiñ difirded an aozadur.

Ur strollad politikel nevez

Stourmerien kougolet o deus skignet d'an 9 a viz Here 90 niverenn ispisial Ribollu, kelaouenn FLNC. Dianzavet int bet ha lakaet ar-maez gant ar reneriezh. Stroñset eo an emsav publik gant an aifarse. An dilenniñ pannañ ha tud e-karg A Cuncolta a ro o dilez, lakaet en niver bihanañ. Krouet ez eus ur strollad nevez : MPA, Movimentu Per l'Autodeterminazione, an devezhioù arak an emvod dalc'h et Vorgo gant FLNC istorel. He fal "krouiñ war-dro rakvennad kevredigezh kinniget gant FLNC, ur wir emsav politikel digor da bobl Korsika".

Abaoe en deiz-se e kaver tri strollad politikel broadelour ganto an aozadur armet, MPA a zo a-du gant "FLNC a-gustum". A Cuncolta gant "FLNC istorel", anavezet mat-tre e labour e-kerz dak bloavezh (war-dro 8000 tarzhadenn). Ur skouerenn en deus roet e penn kentañ miz Genver. ANC e kreiz an aler a sikour Resistenza.

Ar Jakobinourien o youc'haj

An holl traoù-se ne c'hellont ket diluziñ stad an enezenn. An drouklazhoù graet (gant ar varbouzet ? gant ar mafia ? gant ar c'hlanioù ?) a zau evit luziñ an traoù. Goullenn a ra tud a-zehou (Pasqua, Leotard) ha tud a-gleiz (Chevenement, Carraz) d'ar gouarnamant gall dilezel raktres Joxe. Goullenn a reont ivez stad mall : kas an arme ha startaat ar surentez, lakaat ar vroedourien en toull. Lazhan ar bobliù (Pobl Korsika, Pobl Breizh ...) setu o respont.

E-giz ma lavare Dominique Bianchi dilennad kuzul rannvro (MPA) : "Ret eo anavez e c'hellomp atav komz eus pobl Korsika o vevañ peogwir hon eus aozadurioù armet". Diaes eo kompren an dra-se war an douar bras. Stourm pobl Korsika a zo ur brezel. Petra a reomp ni e Breizh ? Kousket omp ?

Gouind a raio pobl Korsika he dieubidigezh. Pouezus eo he stourm evidomp. Ma vefe dieubet hi, stad c'hall a vefe war hent an disrannañ. An o deus ar jakobinourien. Ha pobl Breizh a c'hellfe firval ? Hag atav e vo o sellout ouzh an istor ? Politikourien strolladoù bro-C'Hall o deus komprenet an dra-se ha nac'hañ a reont ur statud nevez e Korsika rak broliù all a c'hellfe kaout ur statud emren. Parak e c'hellfe gounit pobl Korsika gant he stourm kalet ur statud emren ha ni netra ? Piv a c'hello ober an dra-se evidomp ? Ni hon-unan a c'hello sevel ar stourm amañ evit kaout ar memestra. N'eus forzh penaos, kondaonet eo stad C'Hall ivez. Ar Gorsiz a fell dezho o dieubidigezh. Stourm a reont betek o fal.

(1) Ur strollad nevez enep ar stuj. Stourm a ra ouzh an drafkourien a lazha yaouankiz Korsika. Lavaret en deus an emvod kelaouiñ : "Lazhet e vo ar re a lazha hon yaouankiz. Kondañet d'ur marv int".

Yann Riou

# LITUANIA : 1870-1988

Kinnig a reomp amañ un troc'had istor eus ur vro a glever kalz anv anezhi war ar c'hazetennoù er mare-mañ, Lituania, unan eus ar broioù balt, republik kentañ en URSS oc'h embann he frankiz adc'honezet d'ar Sul 11 a viz Meurzh 1990. Hervezomp, ec'h eo gwall-bouezus heulh a-dost emsav Lituania, pouezusoc'h evit Brezel an Eoulimaen, daoust ma oaromp ervat ec'h eo stag an darvoud-se ivez ouzh amzer-da-dont pobloù bihan, evel hini Palestin hag hini Kurdistan en ur mod bennak marteze.

### AZGINIVELEZH

1870 : Daoust d'ar gwaskerezh a ren war ar vro a-bezh, e oad krog da embann Kazetennoù LituaneK e KOENIGSBERG (KARALIAUCIUS e LituaneK), kêrbenn Prusia ar Reter.

1883 : En-dro d'ar gazetenn guzh Austra ("gouloù-deiz") en em vode ar vroadelourien, o stourm war un dro a-enep d'ar mac'homerezh politikel rusian ha d'ar polonekaat oc'h ober e reuz war sevenadur ar vro. Kaset e oa ar gazetenn en-dro gant

mouget er gwad alies. Evit ar wech diwezhañ ivez ec'h esaeas ar bolonegourien, anezhe mistri ar vro abaoe pell, miret al lituaneg da zistroadañ ar poloneg en iliz. Krog e oa ivez Yuzevien Wilno (Vilne e yidich), anezhe tud paour ha devot-40% eus kêr a oa yuzev-d'an em sevel (Bund Socialist, Paole Sion ar sionourien). Dont a rae war wel intellektualed hag arzourien e meur a gêr eus ar vro hag ivez koñversanted ha bankerien hag a c'hoarfe, betek fin ar bloaz 1939, ur pezh roll en eskemmoù etrevroadel Lituania.

Lakaat tizh a reas an Istor e miz Gwengolo 1917. Gant ur c'hendalc'h broadel e voe dilennet ur C'huzul da Lituania ("LIETUVOS TARYBA") hag a c'houlennas kenkent e vije dizalc'h ar vro. Disklariet e voe frankiz ar vro e Vilnius d'ar 16 a viz C'hwevrer 1918, kuit a c'hortoz ur respont digant ar Rusianed. Da gefiver an arsav-brezel, e miz Du 1918, ec'h eas an Alamaned kuit. Ne oa ket erru c'hoazh koulz an dizalc'h da vat. Diwezhatat e voe ar peoc'h betek an 12 a viz Gourelen 1920, abalamour ma oa bet aloubet ar vro gant ar Volcheviked ha savet ur republik gant ar Sozialour Soviedel gante d'ar 16 a viz Kerzu 1918, pezh a astennas ar brezel etre Komunourien, baroned balt hag engannerien alaman.

### KOULZ AN DIZALC'H

Buan a-walc'h e c'houezas ar stad nevez-krouet, enni ur boblañs desket ha gouizieK, doareoù ekonomikel ha sosial eus ar re wellañ. Spontus e voe bras ar gwellaat evit a sell ar sevenadur. Lañs a oa gant an arzoù hag al lennegezh. Ur gevredigezh vroadel eo a oa ganet, ha hi a-ziwar ar maez, evit al lodenn vrasañ anezhi. Ar sistem-gouarn dre vreoù, avat, a oa re frank, marteze, evit ur vroad n'he doa bet biskoazh tro da bleustriñ war an demokratelezh, kement ha ken bihan ma voe bruzunet ar strolladoù er vreoù ("Seimas"). Distabil-kaer e voe ar vuhaz politikel ha dre-se ec'h erruas galloud krouñ ar prezidant Antanas SMETONA e penn ar vro e 1936.

### FREUZ HA REUZ

Da heul ur pennad kuzh eus an emglav alaman-soviedel e voe aloubet ar vro gant ar Arme Ruz d'an 15 a viz Mezheven 1940. D'an 3 a viz Eost, war-lerc'h ur prosegus demokratel diwar-neuz, e troe Lituania en



AR BREZEL-BED KENTAÑ

Dalc'het e voe, adalek 1914, gant an Alamaned, pezh a arvent, diwar-neuze, ar BALTIKUM, c'hoant gante marvat chom vezañ un diazez a-feson d'an azginivelezh-se. War ledanaat ec'h ae an emsav vroadel, en desped d'an evazherezh ouzh an embann, dre gazetennoù oberiant a-walc'h (18 kazetenn e Vilnius e 1914, evit 250 000 a dud o chom eno).

Jonas Basanavicius, medisin war ar maez ha gwir dad da azginivelezh vroadel Lituania. Dont a ray an hengoun-pobl, dreist-holl ar c'hanaouennoù a-c'hez-kozh, "DAINOS", priziell-kaer gant ar bobl, da se. War ledanaat ec'h ae an emsav vroadel, en desped d'an evazherezh ouzh an embann, dre gazetennoù oberiant a-walc'h (18 kazetenn e Vilnius e 1914, evit 250 000 a dud o chom eno).

ur republik soviedel, staget ouzh URSS gant patred eus ar vro, evel m'o doa graet en Estonia hag e Latvia. Mont a reas an taol er c'hleuz. Den ebet ne zeuas d'an em ginnig e gwirionez goude ma 'z eus bet lakaet da grediñ ar c'hontrol war-lerc'h.



Prezidant V. Landsbergis

Pa voe galvet an holl d'an arme d'ar 5 a viz Mae 1944, ne reas ket muioc'h a varzh. Er stourm a-enep d'an amsverien armet hag a-wechoù er c'hiask war-lerc'h Yuzevien ec'h ez iliz eus ar bolis lituanat, bet gopret a-douez gwashañ kañfarted ar vro hag alies a-douez ar minorelezhioù (bielorussian dreist-holl) a rae o reuz puerlesañ.

Genver 1943, sevel un azrann waffan SS gant patred eus ar vro, evel m'o doa graet en Estonia hag e Latvia. Mont a reas an taol er c'hleuz. Den ebet ne zeuas d'an em ginnig e gwirionez goude ma 'z eus bet lakaet da grediñ ar c'hontrol war-lerc'h. Pa voe galvet an holl d'an arme d'ar 5 a viz Mae 1944, ne reas ket muioc'h a varzh. Er stourm a-enep d'an amsverien armet hag a-wechoù er c'hiask war-lerc'h Yuzevien ec'h ez iliz eus ar bolis lituanat, bet gopret a-douez gwashañ kañfarted ar vro hag alies a-douez ar minorelezhioù (bielorussian dreist-holl) a rae o reuz puerlesañ.

### UR REPUBLIK SOVIEDEL HOGOZIK HANVAL OUZH AR RE ALL ?

Aloubet e voe ar vro gant ar Arme Ruz d'ar 24 a viz Here 1944: ha hi mont da soviedel adarre. Dre gaer ha dre hog e kempennour buan pep tra hervez patrom komunour ar soviedoù. Gwasket e oa ar boblañs -katolik 85% anezhi- a-fet he broadelezh hag he relijion. Divroañ a reas 80 000 a dud etrezek ar C'Huzh-Heol, kaset e voe 34 000 da lec'h all ha karzhet 100 000 a boloniz. Drouklazhet e voe belieien, diskaret pe serret ilizoù. En o unan en em gavae Lituani war o douar, dinerzhet ha dismagañset, evit talañ ouzh

gouerien. Renablet e oa bet 600 000 a dud da gas kuit etre ar 24 hag ar 27 a viz Meurzh. Ar stourm armet a gaskas diwar-se. E-pad 10 vloaz e pado c'hoazh e koadier ar c'hreizteiz. Pa'z echuas e tommas an dud ouzh ar feiz evit chom stag ouzh o broadelezh.

Mouget e voe ar vro e-pad bloavezhioù, dreistveañ a rae avat ar fiziñs an amzer da zont ; bazañ 'voe manifestadegoù zoken e Kaunas, bet kêrbenn Lituania dizalc'h, er bloavezhioù 70. D'ar Sul 14 a viz Mae 1972 e varve ur paotr yaouanc, Romas Kalanta, bet lakaet tan gantañ en e zilhad, dirak an tier a oa bet sinet enne adstagañ Lituania ouzh URSS. Da heul obidoù ar merzher yaouanc e savas reuz er vro. Emgann a voe e Kaunas etre soudarded ha paraed ar c'KGB hag an dud o vanifistiñ. Kalz a dud a voe lazhet.

1987 : abaoe daou vloaz emañ Gorbatchov e penn ar galloud, o kas war-raok perestroika ("adurzhiañ") ha glasnost ("boulleaded"). Krog eo Lituani d'en em vodañ ha diskleriañ a-wel o c'hoantioù hag o nerzh, e-kerz gouelioù kanerezh an harv. Prestik e voe prest ar Valed da gas war-raok emsavoù politikel gwirion.

Joel Donnart, 13-01-91 (da vezañ kendalc'hat).



Distro relegoù an harluidi lituanat eus Siberia e 1989

Yuzevien. Kreskiñ buan a reas ar stourm gant arme a-enep d'an Nazied hag ar stourm gant armoù a-enep d'an Arme Ruz.

Gant an diouer a soudarded ha diwar adenaouiñ kasoni ar boblañs ouzh Soviedez, e klakas an Alamaned, e miz

impalaeriezh divent ar Reter, pa oa bet tennet dioute minorelezhioù (Bielorusianed, Yuzevien, Poloniz, Ukrainiz) hag a rae d'ar vro bezañ pinvidk ha liesdoare. Ouzh ar c'hollektivelat e stourmas Lituani adalek 1949. Mouget-kriz e oa ar

### Goude arsaill Vilnius ha Riga

#### Dislavarioù e Moskov

Goude m'eo bet adkennet ar stur gant an Urvaniezh Soviedel e Vilnius hag e Riga e c'heller en em c'houlann piv zo o ren e Moskov. Ha Mikael Gorbatchov eo ar mestr war an armeoù o deus kaset a-benn e bolitikezh evit ar broioù balt ? Raktrezet en deus pep tra pe lezet en deus ar jeneraled c'hen ober ? Pe n'eo ket gouest ken da lakaat an ofiserien, aet skuzh gant ar frankizouriezh da sentiñ ? Ar 14vet a viz Genver e lavare-eh ne ouie ket an deiz a-raok e vije bet lazhet tud e Vilnius. Mard eo ar prezidant an hini a ren ar vro c'hoazh e tefe da neboutañ rakwelet pezh a cheñ c'hoarvezout. "Den ebet eus ar Galloud kraz n'en doa roet urzh ebet" emae B. Pougo, ministr an Diabarzh. Ha dre-se ne vije ket ar C'Hermin Kirek eus ar pezh zo bet graet gant e soudarded ? Nemet hag assanlet e vije n'emañ ket mui ar Prezidant o ren hag en deus disoñjet ar gouarnamant gouarn.

Y.V.T.

# GOUDE DRAMA CHICO MENDES ...

## An Ankou war-dro an Indianed e koadeg Amazonia

Pa 'z emañ an eoul-douar o lazhañ en Irak, emañ an aour e Brazil oc'h ober o stal d'ar yanomamied, ar bobl indian primitivañ er bed.

"Du ez eas an heol, hag al loar par da liv gwad. War an douar e kouezhas stered an oabl". (Tennet eus an Apokalips). "Pa vo bet marv ar sorserien ziwezhañ e kouezho an oabl war an douar. An heol hag ar stered ivez a gouezho ha teñval e vo pep tra". (Tennet eus kredennoù ar Yanomamied).

### Evel en "Asteriks"

Ouzhpennik 10 000 a dud eo an Indianed Yanomami, etre gwazed, merc'hed ha bugale, kollet en o c'heriadennoù, eus ar re-mañ degadod strewet rouez e komad-bro Norz-Brazil, e stad Roraima. War un dachennad douar a-vent gant Portugal int emledet ; un indian war bep 10 kilometr karteiz n'eus ken. Izeloc'h eget hini Dezerzh Sahara eo stankter ar boblañs Yanomami. Evel galianed Asteriks, eo gouest an Indianed Yanomami da herzhel ha da badout pell ouzh o flanedenn, leun a vusfent zo enno, hag e kredont e c'hell an oabl kouezhañ da be vare bennak a vefe war o fennoù hag ivez evel-just war pennoù an Nabe, ar ger a reont gantañ evit komz eus an holl re na gomzont ket o yezh dezho... Omame, "krouer an dud holl", a reas da gentañ ar Yanomamied, a lakeas ar re-mañ e kreiz-tre ar bed, hag a yeas da ziskuilzhañ. N'eus ken goude e yeas war-dro pobliedigezh an trowardroù, en ur lakaat tud egzolek-tre. C'hoarzhin a ra ar yanomamied diwar-goust an dud drolik-se, hag a zeu a-wechoù d'ober ur gweladig dezho. Ma teufe d'ur stroallek a zen gwenn da strobñ e dreid ha da gouezhañ en-traoù gant un islonk, tarzhiñ da c'hoarzhin a rafe an Indianed ha yeuc'hal heligentañ, evel pa vijent oc'h ober joa d'ur skipailh football, lakaet ganto ar volctenn er pal.

### Sorsier meuriad roueel Breizh Veur

Evit ar re wann, avat, n'eus ket e-barzh stad ar yanomamied peadra da c'hoarzhin, ha seul vrasoc'h ha galledeoc'h e vez ar meuriadoù fasoù gwenn, seul lemmoc'h e tiskouezont bezañ nec'het gant planedenn ar "yanomamied c'hoarzh-atav". George Bush, cacique keriadenn vras amerikanek an Norz ez eus bet fall dezhañ mont da wladennañ anezho -e-ser un droiad e Brazil. Ar priñs Charles, Sorsier Meuriad

Roueel Breizh Veur, a felle dezhañ ivez ober anaoudegezh gant Indianed Roraima. Met int o-daou, ar Bush koulz hag ar Charlez o deus bet ranket diwezhattaet o zroioù en Amazonia. An O.N.U., avat, he deus bet roet un diplom da unan eus kasiked ar yanomamied abalamour d'e stourm evit difenn ar Goadeg Veur. Ma...

Rak krog mat eo an indianed o-unan da zifenn ar goadeg. Ken nec'het hag ar re...

lavarer dezho ez int seven.

15% eus ar boblañs en ur ober 3 bloaz

War-lerc'h kantvedoù buhez tre e-barzh ul lec'h distro -hag a reas anaoudegezh gant kirri-nij a-raok ober gant kirri-samm-an niver yanomamied war o douaroù, a zo, abaoe 1987, izeloc'h eget an niver a re wann. Dedennet gant an aour, ur ouenn avanturieren he deus aloubet Roraima ha



Mamm ha bugale marnonet ha paket gant ur c'hleñved krochen e Romochethere, ur vro Etopia Vreizhan lech m'eo marvet 1/2 ar boblañs dindan 3 bl.

wenn eo pennoù-bras ar meuriad yanomami gant planedenn o fobl. Int a gav dezho emañ Yanomamied ha Tud wann en arvar, e kouezho an oabl a-barzh pell hag e vo echu d'an Denelezh. Ar Finvez a zeu, emzo, peogwir emeur o tiouennañ ar yanomamied. An diouennañ-se eo en deus lakaet anv ar yanomamied da dalbenn pajennoù kentañ kelac'hennoù pobloù ar bed a-bezh ; ar pobloù-se hag a kemmet boazioù ha doareoù an Indianed. E barr ar c'hlaskezh aour, e konter betek div denonned ar miz eus ar maen prizius tennet eus douar ar yanomamied. Evit ar re-mañ da vezañ er bed ar brasañ ha primitivañ meuriad kentidien chomet dizarempred gant sevenadur ar re wann, bezañ emaint o chom war unan eus ar rannbarzhioù pinvidikañ war ar voull-douar ! Met, pa vezent gant memes niver a dud



## Pennad-imor

### UR GERIADUR GALLEK

Pa vez bugale deoc'h er skol ne vez ket d'hortoz kléout anezho o lant d'ar ger gant ar genoù-mañ "ar mestr an deus laret prenañ ur geriadur". Unan gallek, evel-just, er skol c'hallek.

En ur stal e tigorit al "Larousse maxi débutants", evit skolidi ar c'hentañ derez. 20 000 ger e-barzh a-hervez. Hag ouzhpenn, ur pennad diwar-benn "ar galleg er bed" hag "ar yezhoù komzet er Frañs".

### Yezh-vamm

Ur bras a bennad. "Mar dout o chom e Frañs abaoe out gant en ur familh c'hall eo ar galleg eo da yezh-vamm".

Ar Vrestoned, a zo "gallac'oued" hervez al lezenn c'hall, eo ar galleg o yezh-vamm, ha pa gomzont brezhoneg ? Ar brezhoneg a zo galleg eta. Quod erat demonstrandum (e galleg : CQFD).

Pa, ma ne gomzomp ket galleg eo peogwir n'omp ket e Frañs ? Da zibab ?

### Yezh, pe parlant ?

N'eo ket echu. Pelloc'h : "Da dud ... deuet eus ur vro all da vro-Frañs a gomz etrezo pe gant o yezh-vamm".

Me soñje din o da yezh-vamm ur bugel an hini a gomze e dud outañ. Fazioe o an : ar galleg eo hini forzh pe vugel ganet e Frañs, ha pa ne vefe ger galleg gantañ er gêr !

Ma 'z out eus ur rannvro c'hall e-lec'h ma c'haller ober gant ur parlant disheñvel, da skouer ar brezhoneg, an euskareg ...

Ar brezhoneg n'eo ket ur yezh, evel ar galleg pe ar yezhoù estren, ur "parlant" an hini eo. Setu perak n'hall ket bezañ ar yezh-vamm maritezo.

### Hag hor yezh ?

Goude ur gartenn eus ar "francophonie" e teu un istor eus ar galleg.

"Ne ouzer nemet nebeud a dra eus ar yezh a gomze ar c'halianed". Tu a vije bet da lavarout e oa ur yezh kar d'ar brezhoneg, met gwelot hon eus n'eo ket ur yezh.

Evel just n'eo ket el lev-mañ e vo desket d'ar skolidi eo koshoù ar skind brezhonek kostañ (Domsridk Leiden, er 7vet kantved) eget ar skind gallek kostañ (leou Strassburg, e 843').

Da c'hortoz, ma fell deoc'h klemm eveldon, kaset ho lizhin d'an Adour René Lajune, rener ar geriadur, 17 rue du Montparnasse, 75298 PARIS Cedex 06.

Yann Leskildri

\* Komzet-se a lak da soñjeñ ne vije ket ur leiz hez gwelout ur pennad a-divout istor ar brezhoneg er Geriadur Hollvezhonek a ziele dont er-maez war-dro 1992

atav a-hed ar c'hantvedoù, setu ma tigrsek an niver a yanomamied, paket gant ar c'hleñvedoù pe an anaoudegezh. En ur ober tri bloaz ez eus bet marvet war-dro 1500 indian, hogos 15% eus ar boblañs anezho ha se abaoe 1987.



Emgannoù, kleñvedoù, anaoudegezh ha gwali-levizonlezh

Lod pennoù-meuriad zo, e-touez an Indianed, ha lod all, e-touez an ekologourien, a laka ez eo kiriek da se an aloubidigezh gant ar glaskerien-aour -anvet "os Garimpeiros" ahont. "Ar re wann n'ouzont ket eus se peogwir n'eus ket a sorserien en o zouez, met, ma vez kaset ar yanomamied da get, e kouezho an oabl war an douar hag e vo echu holl ... Re wenn hag all. Hon digoil eus ar re wenn a gavimp neuze" eme ar Sorsier Kopenarva.

1°/ E 1987 -diouzh a jeder- e oa bet lazhet war-dro tregont indian en emgannoù gant ar glaskerien-aour. Ar re-mañ zo ugent bet lazhet en o zouez. E 1987 endeeun o doa an daou strollad peget en armoù : daou indian ha tri c'hilasker bet lazhet. Met diwar ar c'hleñvedoù e varv muioc'h a dud c'hoazh.

2°/ En tu all d'ar c'hleñvedoù evel an naplez o deus ar glaskerien-aour degaset un doare malaria kalz kaleoc'h eget an hini e oa boas an indianed outañ. "Un euzhvil zo din e-barzh ma c'hoñ" a glemme e miz Gwengolo 1990 ur yanomami kozh, paket gant "unan eus ar c'hleñvedoù nevez-se hag a zeu ingal da redek dre ar vro abaoe ur pennad". Romochethere eo da vat "Kerriadenn ar boan" en uhelgompezen ar yanomamied. E miz Genver 1990 e oa 150 indian o chom enni. E miz Gwengolo er memes bloaz ne chome ken 50.


3°/ At last but not least, an drafikerien aour-se o deus sanket e pennoù indianed boazioù-beveziñ noazus ouzh o buhez. Roet o deus dezho bleud, sukr, garsonioù, kontilli, bourc'hili forzh pegement. E berr-

amzer erru-mat gant ar re aloubet. Deuet int da vezañ o difanterien war-zigarez pourveziñ anezho. Hogen dajerius-tre eo an daremprederezh-se rak "pa eo bet skarzhet ar glaskerien gant ar gouarnamant eo bet forret emdro hedorr buhez an indianed, ha kroget int da chouzañv kalz. Ne c'hounezont ket mui an douar, kollet eo o gouestoni-chaseal ganto, dre ma kave dezho en dije "gouvarc'had ar glaskerien" padet da viken. Bremañ eo naon o deus ar yanomamied.

Hervez ar skiantourien ez eus anv amañ a ouennlazharezh. "Mauriadou zo eo marvet an 60% eus o zud" eme Carlos Alberto Ricardo, denoniour brazilian. "Bremañ e varv an Indianed 4 gwec'h buanoc'h eget e kêr, marvusañ marv eo kleñvedoù-red biskoazh anavezet ganto a-ziagent".

Pa oa bet kavet Brazil e 1500 gant ar portugalad Pedro Alvares Cabral e oa 5 milion a indianed er vro, en daiz hiziv eus ez 130 000 -hag anezho holl ez eus nebeut-kenañ o deus dalchet d'o boazioù sevenadur dezho o-unan. Penaos e vo stad an Indianed e-benn 9 vloaz e bro vrasañ Amerika ar Su ?

F. Kloareg  
Diwar un destenn tennet eus VÉJA, kelac'ouenn  
Vrazilian, Nnn 37, Gwengolo 1990



Ur Yanomami kozh 70 vloaz a zo be roet "barum" dezhañ.

Brazil : En em lazhet o deus c'hwec'h indian e tachen-vro Dourados e stad vMato Grosso do Sul abaoe Nedaleg, 74 Indian o doa graet kement-all e 1990. Hervez ar FUNAI (Aozadur Broadel an Indianed) ec'h eo dre ma vez stank-ouzh-stank ar boblañs ha dre-se diaas-ouzh-diaas ar vuhez e Dourados. Nach a reont mont kuit eus douaroù o zadoù 'vat.

Y.V.T.



Panneloù divyezhek

PENN-AR-BED O KREGIÑ GANTI.

D'ar gwener 11 a viz Genver eo bet eil digoret ez-ofisiel tennad-hent divyezhek kentañ Penn-ar-Bed...



Izili Bodad an Anviou-lec'h pedet da welet disoc'h o labour gant ar C'Hzul-Meur

Un dra a-bouez a vo graet sur gant harp an departamant e 1991. Stallet e vo panneloù brezhonek evit mont e-barzh hag e-maez an 282 gumun a zo an departamant.

War-raok ez a an traoù eta. Ha divyezhekaet e vo holl banelloù an departamant a-benn 10 vloaz ?

Per al Lez

Kinnigoù-labour e brezhoneg

KEIT VIMP BEV
a zo o klask un objektour evit
fardañ an danvez-c'hoari da embann skoazellañ evit ar gwerzh sikour evit mont en-dro ar gevredigezh kas keloù da Keit Vimp Bev 29520 LAZ

EUROSTUDI
hag a zo o labourat war dachenn an douristelezh sevenadurel a zo o klask ur rener, brezhoneger, da gas he obererezh war-raok.
Skrivañ da : EUROSTUDI, BP 22, 29870 Lanniliz.

KELAOUENN
Kazetenn delematek nemeti a ra gant ar brezhoneg
KELEIER
GOUELIOU
STAJOU
LEVRIOU
SKOL UHEL AR VRO
36 15 KELA

AN OALED
a zo o klask war-lerc'h un objektour
evit fardañ danvez pedagogal evit klasoù sevenadurel.
Keloù : AN OALED 29870 TREGLOU 98 04 07 04

SKOL AN EMSAV
ha BREMAÑ
a zo o klask war-lerc'h un objektour
Keloù : SAE 35000 ROAZHON 99 38 75 83

Skinwel

ELZASEG : 8 MUNUD BEMNOZ

En abadenn gelaier pemdeziek FR3, "19-20", e c'hall skinarvestourion Elzas gwelet "Rund Un" a-raok ar c'heleier-rannvro e galleg.

Reuz a savas er vro, e miz Gwengolo diwezhañ, gant lamadur an abadennoù elzasek a veze etre 19e30 hag 20e. Laket e oant bet neuze d'ar Sadorn ha d'ar Sul e kreiz an deiz.

Kan niverus e voe klemmoù an dilennidi ma rankas Catherine Tasca, isministrez ar C'hemennerzh, gouestlañ adkregiñ gant an abadennoù pemdeziek en elzaseg.

Nevezñ an hini zo bet graet abaoe gant FR3. Ur skipailh kazetennerien a ra hiziv war-dro "Rund Un", ha skignet e vez an abadenn gant istitlù gallek etre digoradur "19-20" hag ar c'heleier-rannvro.

Nemet ne fell ket da FR3 paeañ mizoù an abadenn hec'h-unan : klask a ra lakaat ar rannvro da reiñ ar'chant, evel e Breizh. Mat e vije dimp kaout kement a vrezhoneg ivez.

Gweltaz Kerambrun

Justis

PRIZ AN TOULL-BAC'H

Ne vez ket kanet ma leudi d'ar Stad ha d'he brokusted uhel a-walc'h. Pascal Labriet, 36 vloaz, a oa bet tamallet dezhañ jahinañ ha muntrañ ur c'hoziad 70 vloaz, en doa graet ur blasvezh bac'h, a-raok ma voe anavezet gant ar gwir dorfedour, en deus bet 80 000 lur a zigoll. Da larout eo 6 666 lur ar mizvezh, e miz Kerzu diwezhañ.

Brokusoc'h eo bet c'hoazh ar varnerien evit ar c'homiser Jobic brudet p'en deus bet 150 000 lur a zigoll evit 17 devezh toull-bac'h (e 1988), da larout eo tost da 9000 lur an devezh.

Brav eo ar justis-se a oar pe briz reiñ d'an dic'haou, diouz renk an dud. Ha kentañ tro ma vo ar varnerien o vanifestiñ, soñjomp pegen kalet eo doaraoù-labour an dud kaezh-se.

Y.L.

Marv Jean Groix

UN TORFED OUZPENN WAR CHOUG AR STAD C'HALL

Jean Groix, stourmer breizhat (ezel e oa eus an U.D.B.) en doa en em zistrijet e karc'har Fresnes (Bro-C'hall). Harzhet e oa bet gant ar P.J. e-kichen Naoned ; tri Euskarad -izili an E.T.A. war a seblant- a oa bet harzhet en e di vez.

Droukkomzoù a oa bet skignet e-leizh gant ar bolis, ar Stad hag ar mediaoù.



Klasket oa bet tamall ouzh ar pevar dan ur muntr euzhus hag ar c'helou faos-se a oa bet lakaet da redek diwar o fenn.

Goulennet oa bet digant ar barnereklask dieubañ Jean Groix abalamour d'eo stad yec'hel : nac'het e oa bet grous. E-unan-penn e oa en toull dibaos an 2 viz ma oa bet bac'het, ha nac'het dezhañ zoken mont da ofereñ ar Pellgent I Koulskoude n'eo ket ar barner hepken a c'heller lakaat da dorfedour ; ar Stad C'Hall an hini eo, gant ar Strollad Sokialour en he fenn. Kant den a oa o vanifestiñ e Baiona d'ar mœurzh 29 a viz Genver. Manifestadegoù all a oa bet an deiz war-lerc'h e Hegoalide (Kreisteiz Euskadi).

Klaod an Duigoù

Sadorn 2 a viz C'Hwevrer

Manifestadeg sioul (galvet gant UDB hag Emgann Naoned) gant banelloù ha sonerien zo bet disadorn goude kreisteiz dirak Palez Justis Naoned e memor Jean Groix, evit diskouez hon heug dirak an darvoud-mañ hag evit ma ne chomfe ket hep heuliad afer emiazh ar stourmer. Keloù all a vo roet deoc'h diwar-bann an afer-mañ e niverenn a zou Bremañ gant ur c'henskriver eus Bro-Naoned.

Bremañ

Berr ha Berr

HA DISKARET E VO PONT SOUZAIN ?

E-doug miz Kerzu ez eus bet tu da welet ar skriflet divyezhek-mañ war mogerioù Sant Brieg. Kalz a diez kozh zo bet diskaret e Sant-Brieg dija. Kaoz a zo bremañ da ziskar pont Souzain (e trañ straed al Lega war hent Plarin).

Evit mont a-enep kement-mañ ez eus bet savet ur gevredigezh nevez : "Bevañ ar vro". Ma krog he stourm gant ar pont-mañ, bez' emañ ivez e soñj da labourat a-enep da raktresoù promotourien zo a garfe rastallat gweneien war hon aodoù. Stourmadegoù broadel a vo aozet gant "Bevañ ar vro".

KENAVO TE A OA RE VRAV ADIEU TU ETAIS TROP BEAU



Savet eo bet gant Patrice Henri, 113 rue du Logeù e Sant Brieg, evit ar gevredigezh "Bevañ ar vro" ("Vivañ ar Pevrañ"). A-benn ar fin eo bet divizet na vefe ket distrujet ar pont a zo anv anezhañ.

ENEZENN BREIZH

Setu ar pezh e c'hellemp lenn dindan anv Fañch Luizet er gelaouenn Figaro (4 a viz Genver) diwar bann an Trode Republik : "Bez' emañ kouriz tenored al lezvarn, lamponned vras, hag houlerien o tont da gerc'hat merc'had Breizh e ti-gar Montparnasse o lavaret dezhe e vefe gwelloc'h dezhe labourat war ribi an hent eget ober ar valezh... Gant ar Vretoned, ar Gorsk a vo ar re muiañ lazhet e muntradeg 14-18, marvet evit Bro-C'Hall". Ha ma vele Breizh un enezenn e c'hellemp stourm e-giz du-hont bremañ ? Ret eo goulenñ d'ar Figaro !

L. Nedeleg



### Ar yiddish, yezh milvedel ur bobl strewet DASOC'HIDIGEZH UR YEZH

Skouer dasoc'hidigezh an hebraeg en Israel a vez implijet alies evit diskouez n'o deus ket da falgaloniñ, emsaverien ar yezhoù marv pe war o diskar. Istor ar yiddish, yezh ar yuzevien gornogour en diaspora, a zo ennañ ivez peadra d'hor c'hennerzhifñ en hor stourm. Dont a reas a-benn da chom bev tost mil vloaz-pad petra bennak ma kenveve he c'homzerien gant nouspet kenel all. Dre studiañ pizh an istor-se, e c'hellfemp marteze goveiañ ar binviji ret evit saveteifñ hor yezh pa 'z eus, hiziv an deiz, muioc'h a draoù boutin etre stad ar vrezhonegerien ha planedenn ar yiddisherien eget etrezi hag hini hebraegerien Israel.

**E**ira an IXvet hag an Xvet kantved GHS eo e tegouezhas e Bro Roen yuzevien o tont eus Bro C'Hall hag eus Bro Italia an Norz. En em lakaat a rejont war rannyezhoù germanek ar c'heodedoù a raent o annez enno. Kenderc'hel a raent koulskoude d'ober gant forzh gerioù eus parlantoù an toledadoù o doa bevet kantvedoù pad o hendadoù enno. Dont a rae ganto ivez gerioù dastumet en o levrioù sakr, levrioù evel ar Bibl, an Talmud, ar Mishna, anezho levrioù skrivet en hebraeg hag en arameeg. A-benn ober pizh diouzh reolennoù sokial ha sevenadurel o relijion, e tibabas ar yuzevien bevañ distag diouzh o endro kristen. An diouer a zarempredoù gant o amezajen a voe kaoz ma teuas o farlant, ar Yiddish, ar yiddish, da vezañ disheñveloc'h-disheriveleñ diouzh re ar broioù edont o chom enno. Implijet e voe ar yiddish evel yezh kentañ o buhez diabarzh gant an holl gumuniezhioù yuzev kornogour betek an XVIIvet kantved. Adalek ar marteze e choazas lod yuzevien alaman divroañ war-du ar Reter slav. Kenderc'hel a rejont da yiddishañ eno a rummad da rummad, met levezonet e voe koulskoude o farlant gant o endro nevez. Forzh gerioù slavek a veze implijet e rannyezhoù yuzevek ar Reter. E-keit hag en em lede ar yiddish er broioù slav e kolle e nerzh en ur C'Hornog a oa speg ennañ lerzhien an ijinerezhañ. En ur dreñ kein d'ar glizioù kozh, e tileze ar yuzevien ar yezh-se a oa warni hervezo liv un alamaneg avoultret. Pa darzhas an eil brezel bed edo an darn vrasañ eus ar yiddisherien o vevañ er broioù slav. Tonket da daliñ mod pe vod ouzhi ha pobloù ar gasoni a vage outo mistri ha pobloù ar Reter, ne choazas ket ar yuzevien ar memes hent. Lod a choazas an enteufñ e sevenadur ar pobloù edont o kenvevañ ganto, reoù all, ar sionourien, a choazas prientiñ an distro d'an douar santel lec'h ma savfent ur stad nevez a vefe an hebraeg ar yezh ofisiel enni, e-keit ma kinnige un tuad all ober keodedoù emren



eus kumuniezhioù an diaspora yuzev kornogour, keodedoù a vefe ar yiddish al liamm etrezo. Hervez an tuad-se, e lakae anat hir-oad o yezh edo ar gwir gantañ. Ali e voe gant an tuad-se ar BOUND (Algemeyner Yidisher Arbeiter Bund in Lite, Polyn un Rusland-Unvaniezh labourerien yuzev lituania, Polonia ha Rusia) ur strollad politikel savet evit lakaat ar yuzevien da gemer perzh e stourm etrevroadel al labourerien. E-doug kendalc'h Tcherbovitz (miz Eost-miz Gwengolo 1908) e voe pleustret war dazont ar yiddishva en em lede neuze er Stadoù Unanet hag en Amerika ar Su ivez. Difannerien an hebraeg na zidanjont ket. E 1909 e voe savet BRIT IVRIT O LAMIT evit raliñ lañs d'an hebraegañ. Dont a reas ar yiddish da vezañ yezh ofisiel e Birobidjan e Siberia goude an dispac'h soviedour. Siwazh ne voe ket pell Stalin o kas ar statud-se da get. E 1920, diwar 3827 kazetenn yuzev e oa 1443 anezho e yiddish ha 635 anezho en hebraeg. Diwar 177 kelaouenn yuzev bemdeziek e oa neuze 155 anezho e

yiddish. War-lerc'h ar brezel bed kentañ e veze embannet gant lod moulerien 500 000 a skouerennoù eus o journal yiddish evit kêr New York hepken. Ar SHOAH eo a voe pennkaoz brasañ eus diskar ar yiddish. Diwar 12 milion a yiddisherien e voe lazhet tremen 5 milion anezho gant an naziourien. Trech ar sionourien en douar santel a voe ivez kollus dezhañ, daoust ma nac'h c'hoazh lod yuzevien gornogour ober gant an hebraeg en Israel, gant ar feuket marv d'int gant implij o yezh rajiliej er buhez lik.

Paol ar Meur


© : BREMAÑ niv. 70-71.

© : Ar bobl yuzev a zo enni daou skourr bras, skourr ar yuzevien gornogour er bed kristen, ha skourr ar yuzevien reterour er bed muzulmat. Estrogeto a zo evel yuzevien, evel ar Falasha, yuzevien du Bro Etiopia (Bremañ niv. 84) hag ivez yuzevien ar Reter pellañ, diskennidi marc'hadourien yuzev deut eus Bro Persia, hag a oa Liu Shaoqi (1898-1968), prezidant Republik Poblel Bro Sina betek 1966, unan anezho.

### Yezh ar galon

## O labourat e Bro Dogon

**E**vel ma ouzoc'h marteze, ez eo gevellet departamant Il ha Gwilun gant Bro Dogon, ul lodenn eus Mali. Evelse, eo bet ekipek kêrbenn ar vro-se, Bandiagara enta, gant ribouloù-dour, gant sikour kêr Roazhon. Ouzh broioù ar Sahel eo staget Bro Dogon, ha taget e oa bet e-pad mare ar sechor er bloavezhioù dek ha tri-ugent.



E teir lodenn eo rannet ar vro-se. En hanternoz emañ ar blaenenn graet gant maen-krag ha vez fraiñhet tamm-ha-tamm dindan nerzh an avel. Bez' emañ ar gompazenn hag en em led davet Burkina-Faso. Hag evit echuiñ emañ an levnen e-lec'h maz eo bet miret sevenadur dispar ar maskloù hag a sach eno un nebeut touristed.

E-pad miz Eost enta, e oan aet da labourat asamblez gant un toullad tud war an dicheñn, e-barzh ur gêriadennig anvet Nalou kollet er strouezh. E-pad penzektvez hon doa labourat a-gevred gant an annezidi, da gempenn ur puñs. Savet hon doa bet ur voget tro-dro dezhañ, hag un dar-betoñs tro-dro d'an toull.

Labourat gant an dud, bevañ ganto a oa pal hor chevrigezh ; ha d'am meno e oa bet tizhet ar pal.

Paour-razh eo an dud e Mali. Paourc'h c'hoazh ez int e Bro-Dogon. E-pad miz Gouhere ha miz Eost e vez mare ar glaveier. Ma ne ra ket glav a-walc'h e vez kollet an eost. Ma vez puñh an eost, e vez alies lonket gant ar c'hirvi-raden. Evit ar mare, n'eus nemet al louzeier chimik hag a c'hell lazhañ anezho. E Bandiagara ez eo kreizennet an

holl binviji hag a c'hell bezañ implijet a-enep d'ar gwalennoù.

Deuet e oa ur mezeg ha div glañdiouriez ganeomp ivez. Ur pzh mell labour o doa bet boul'chet. Bez' oa tud hag a zeue d'o gwelz goude bezañ kerzhet a-hed regont kilometr war-droad. Diwar an douar e teu ar pap brasañ eus ar c'hleñvedoù. Parazitet eo an douar kankoulz hag ar boued. Paz eo puñset an douar don en douar eo glanoc'h. Paz eo puñset war-chorre ez eo saotret.

Dizoloet hon doa bet ivez ur c'hultur dibar. Plijout a ra d'an Afrikaniz dibunañ koñchennoù a-pad an nozvezh. Pa vez ur vailhadeg e rank pep hini marvailhat. A-gevret e vevont atav.

Desket hon doa bet pouez an dañs hag ar

sonerezh. Bemnoz e tañsemp gant bugale ar vilajenn. Diaes e oa komz ganto, evel ne oa ket kalz a dud o c'houzout gallek. Met dre yezh ar galon e oa tu da gompren pep tra.

En Afrika, ne gont ket an amzer. Evel m'eo berr ar vuhez marteze. P'hon doa kuitaat ar gêriadennig e oa an holl achanomp o ouelañ dourek. O tilezel war holl lerc'h tud tonket d'an daonegezh, o tilezel mignonned.

Pegement a arc'hant a vez fritet bep bloaz gant redadeg Pariz-Dakar ? Pegement a arc'hant a vo fritet gant redadeg ar Rihum ? Pegement a arc'hant a vo fritet ma vo brezel a-enep d'an Irak ? E Mali e tebr pep bugel ur volennad to bemdeiz nemetken.

Jakaz-Erwan MOUTON

(tô a zo ur soubenn vijel graet gant mi)

Lennit

Skrivañ da AL LIAMM  
16 straed des Fours à Chaux  
35400 - SANT MALO -

al liamm

Koumanant bloaz 120 lur (studierien, tud dilabour 100 lur)

Embannadurioù

Al Lanv, Kerzu 1990

Talvout a ra an niverenn-mañ dreist-holl evit notennoù **Per Denez** (Brave New World), pennad **Gerard Cornillet** (Adevel Banniel Utopia), Disklariadur **Hollvedel Gwarioù** mab-Den, pennad **Per-Vari Kerloc'h** diwar-benn un "ergerzhadenn" e ti RBL e Kemper (Dindan ar Seizh Amzer), hag al lodenn lennegel gant div droidigezh, unan eus **Henry Miller** (diwar ar saozneg?), ebon eus **Jean Ray**, ur gontadenn gant **Y.G.**, hag ur gwir bennad skridavarezh gant **Alan Botrel**.

Druz eo ar peuriñ ! Ha posubl eo sikour Al Lanv o komanantant :

**BEP DAOU VIZ LENNIT**

**AL LANV**

59 hent kerdronioù Vihan  
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur  
Skoazell adalek 130 lur

"Yann Sohier et Ar Falz" (1901-1935) (e galleg)

Studiadenn savet aketus ha brav diwar-benn buhez ar skolaer yaouank **Yann Sohier**. Stourmer kalonek hag efedus evit ma vefe kelennet brezhoneg e skolioù publik hor bro.

Gant **Soaz Maria** - 90 pajenn - 70 lur - 21x29.7 - Ar Falz - 6 strada Hir - 29600 Montroulez.

Distro **Youenn Gwernig**

Deuet e oa **Youenn Gwernig** da **Gemper** e ti "ar Bed Keltiek" evit kinnig e bladenn nevez "Emañ ar bed va Iliz", nevez embannet e ti al "Lagon Bleu" d'ar 26 a viz Genver.

**P**lijus eo an en-dro ar sal vihan, e solieradur kentañ ar stal "ar Bed Keltiek", lec'h m'edo **Youenn Vras** o tegemer mignonned.

Displeget an deus deomp **Youenn pegen** laouen eo kanañ en-dro, ha kaout amzer dirazañ ; ma 'z eus bet dek vloaz etre an div bladenn diwezhañ ne vo ket gortozet ken pell evit an trede. Sed pezh a zo bet prometet gant **Youenn**. Prastik e vo un all gant kanaouennoù nevez.

War ar bladenn-mañ (kompakt pe kasedig) "Emañ ar bed va Iliz" e kaver testennoù bet skrivet evit lod vrasañ anezho er Stadoù Unanet pe neuze pa

Embannadurioù An Here

Nevez deut er-maez e zastumad SKOL AL LOUARN

E rummad \*\* (evit ar vugale 7/10 vloaz) : "Ki ar penn marv" gant **Erwan ar Moal** - Skeudennoù gant **Tudual Huon**. 40 lur.

"Ur breur lazhet, ur c'hi feal, ur c'hastell gwer ha dir e-kreiz ur goadeg teñval ur vestrez kevrinus o ren warnañ, servijourien vut..."

Kambr ar Melezourioù, un den dibenn ha bev koulskoude o klask e zial...

Hag a-hed al linennoù : kri-forzh, sport ha spouren, skrij hag euzh, ha skeud an Ankou a-dreñv ar gerioù !

E rummad \*\*\* (evit ar rakkrennarded hag ar grennarded) : "Ar pennoù koltar war an enez" gant **Mich Beyer** -

skeudennoù gant **Alan Dipode**. 50 lur.

"Un enezenn difennet grofs mont enni, ul lamponig a drizek vloaz savet e-kreiz an noz da furchal er yenervez, daou gañfard all berroc'h o foell eget o zoad..."

Meskit mat, lakait ouzhpenn tri pe bevar laer vil, ur vag pe ziv, bras pe vihan... Opala, tudoù ! Ne lavarint ket muioc'h ! Evit gouzout hiroc'h, kit buan da heul ar Pennoù Koltar. Kevrin ha kann, bach ha peñsa, tach ha trech. Sed aze ar pezh a ginnig deoc'h Erla, Fañch ha Jozefa... Mard oc'h kalonek ! Prest oc'h ?

An Here - strada **Guy-Lussac-Kerc'horr** - 29480 **AR RELEG**

An ti e traoñ ar c'hoat

Ul levr eñvorennoù eo **AN TI E TRAOÑ AR C'HOAT**, kontet gant **Frañsez Kervella**. E vugaleaj e ti Mesnaot war ribl an Elorn hag e-tal Bodkenal e Dirinnon nepell aus **Plougastell-Daoulas**.

Chomet emzivad e 1917 diwar goust ar brezel e weler ur paotrig o vevañ tost-tro ouzhan natur ha, daoust d'an darvoudoù kriz ha kalet, oc'h ober anaougegezh gant an dud, al labour, ar skol...

Ul levr 200 pajenn, ment 14,5x21, gant skeudennoù, priz : 90 lur gant 10 lur mizoù-kas digant **Mouladurioù Hor Yezh**

Gwrez an trovanoù

13 danevell buhezek ha plijus da lenn, savet gant **Roparz Broudig** diwar-benn buhez ur martolod, **Yann Vadez** e anv. 150 pajenn, 74 lur e ti **Embannadurioù Hor Yezh**.

- **Tereza Desbordes** - 1 plasenn Ch. Peguy - 29260 **LESNEVEN**.

† O paouez klavet ar c'helou amaomp eo aet da anaon **Roparz Broudig** diwar ur c'hleñved skrijus.

D'e familh ha d'e vignoned e kasomp hor gourc'hemennoù a gemañ.



oa nevez deut en-dro ar barzh da **Vreizh**. Degas a ra da soñj ar pozioù e-barzh tud evel **Kerouac** pe **Walt Whitman**... buhez pemdeziek **New York**, ar gêr vras ; e "Mintinnoù" pa vez ar beure disoc'h poanlus an nozvezh kent, ha pa ranker koulskoude mont da labourat. Gant plijadur e kaver testennoù anavezet : "E kreiz an noz" kempennet a-nevez pe "Bretan Blues" e stumm Gospel, hep disoñjal mouezhoù flour **Mari-Loeiz** hag **Annaig**, e verched.

Elen Riou

E gwerzh e pep stal a-zoare pe digant al "Lagon Bleu", Ar Fouilhez.

Kemennadennoù



Ezhomm ho peus da c'hount un nebeud gwenneien ? C'hoant ho peus labourat e-pad ar vakañsoù oc'h ober un dra a blij deoc'h ? Plijout a ra deoc'h ober war-dro ar vugale ? Gouzout a rit brezhoneg ?

Deult da animatour(ez) an Oaled eta !

Ma ri'hoch ket stummet war ar vicher, e kinnig An Oaled a-gevret gant an U.B.A.P.A.R. ur staj B.A.F.A. e-kerz vakañsoù an Ened.

Ar staj-se a ya d'ober lodenn gentañ ar B.A.F.A., an diazez teorikel eo. Eus an 23 a viz C'Hwevrer betek an 3 a viz Meurzh. Priz : 2000 lur.

Ma ri'hoch dedennet pelgomzit deomp an abretañ 98.04.07.04.

RADIO BRO -88.2-

Program Miz C'Hwevrer 91 d'ar Gwener da noz

8eur : kinnigadur program an abardaevhez, gant **Maï pe Serj**; 8e10 : "Ar c'hardeur kolonial" (istorioù berr ha fentus), gant **Gwendal ar Floc'h**; 8e30 pennad-stur gant **Serj Plener**, keleier brezhonek gant **Maï Dupuy**, keleier gallek gant **Serj Plener**; 9e : **Mesk-divesk** (gouelioù, fest-noz, diskouezadegoù, stajoù, levioù ha pladennoù nevez, kemennadennoù a bep eurt ha c'hoarioù) gant **Jean-Louis Allard**; 10e : magazin miziek : d'an 8 : savet abadenn diwar-benn **Paul Sébillot**, gant **Dominique Besançon**, d'ar 15 : magazin ar brezhoneg gant **Serj Richard**, d'ar 22 : ekonomiezh, gant **Yann Fievet**; 11e : abadenn viziek : d'an 8 : radio lec'h, d'ar 15 : abadenn rock kinniget e brezhoneg, gant **Olier Cochard**, d'an 22 : **Terrière de chez mon père**, gant **Marc Paraire** ha **Michel Clech**.

Radio-Bro, B.P. 639, 75367, Paris Cedex 08, p. 47 61 00 75.

**Radio AlterNantes** (19 str Nancy 44300 Naoned) a ginnig abadennoù brezhonek pe gentoc'h un abadenn rock e brezhoneg tost bep lun da nav eur hanter (9e30 noz). **TROUZ AR MOCH** eo anv an abadenn produet gant **Rachid Bara**, renet gant **Bertrand Bourmesaux**, ha kinniget gant ar c'habiten **Gweltaz** gant skoazell ar gevredigezh **Gwenn Kivi**.

Rock hepken, pe dost, gant strolladoù pe garterien a gan e brezhoneg, galleg, saozneg, kembraeg, alamaneg, finneg hag all...

Gweltaz Adeux (E.V.)

Bremañ niv. 113 miz C'Hwevrer 91

Lizhiri	.....2
Kendiviz	.....3
Brezel	.....4-5
Deskadurezh	.....6-7
Tibet	.....8
Korsika	.....9
Istor lituania	.....10
Lituania	.....11
Yanomami	.....12
Indianed Ammazonia	.....13
Panelloù	.....14
Keleier	.....15
Ar yiddish	.....16
Bro-Dofon	.....17
Embannadurioù	.....18
Kemennadennoù	.....19
Stajoù ha beajoù	.....20

Ar pennadoù gant **Gill ar Frank** - **Emgann** - **J.Y. Broudig** - **APEEB** - **Lena Louarn** - **POBL** - **Y.V. Thorel** - **Barbra Kerien** - **Jakez ar Fur** - **M. Kerrain** - **Klaod an Duigo** - **Y.F. Komeis** - **Yann Riou** - **Joel Domnart** - **G. Kerambun** - **Lukian Kergoat** - **Fulup Kloareg** - **Y. Leskildin** - **P. al Lez** - **Noella Olier** - **E. Riou**.

**Maketenn** gant **J-M Roynard** - **Lena Louarn**

**Tresadennoù** gant **Nono** - **JAP** - **Raletz**

**Luch'skeudennoù** gant **A.V Chapalain**, **J.M. Roynard**, **Lena Louarn**, **K. an Duigo**, **An Oaled**, **Lionel Flageul**, **U Ribombu**, **Antonio Ribeiro**, **Lungta**.

**Skoazell difaziñ** gant **Herve Bihan** - **Olier ar Mogn** - **Dominig Jolivet** - **Herve Kerrain** - **P. Ar Marcheg**.

**Renerezh Bremañ** : **Lena Louarn**.

**Moulet e ti moulezh** an **OSCR**

Skritet e-barzh **Bremañ** : kasit ho pennadoù (war paper pe war pladennoù urzhizataerezh) hag ho luch'skeudennoù **a-raok an 20 a viz C'Hwevrer** ! Diwallit : doujit d'an deiziad-mañ mar-plij !

**Koumanant buan :**  
**150 lur/bloaz**  
**Estren-stad 200 lur**  
**12 niverenn**  
**Koumanant-skoazell adalek 200 lur**  
**8, strada Hoche**  
**35000 Roazhon**

## Fest-deiz / Fest-Notz

D'ar Sul 24 a viz C'Hwevrer e vo dalc'het **Fest-Deiz Kreizenn "Roparz Hemon"** adalek 3 eur. Sonerien : Mahe-Blanchard, LeSaint-Urvoy, ha kanerien : Texier-Rousvoal.

Tavarn ha krampouezh - plijadur a vo !

E Pedernege (Bro-Dreger) aozet gant Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg, d'ar **Sadorn 30 a viz Meurzh**, gant Bernard Lasbleiz, Iffig Troadeg, Kastell-Gorju, Lintanf-Robin, Moal-perron, Chaplain-Jaguin, Leard-Feon, Marius-Morvan.

## Stajoù ha Beajoù

Kinnig a ra An Oaled, Kreizenn Sevenadurel Treglonou, meur a frapad dudi evit ar vrezhonegerien e-kerz vakañsoù an Ened (Miz C'Hwevrer).

-Evit ar vugale (etre 6 ha 12 vloaz) :

-**Staj Gouren e Berrien** eus ar 17 betek ar 24 a viz C'Hwevrer gant Tangi ha Brendan Ar menn. Priz : 1000 lur.

-**Staj kan ha tresañ** e landelo eus ar 24 a viz C'Hwevrer betek an 3 a viz meurzh. Gant Jean-Luc Roudaut (kaner hollvrudet Rêves de Gosses) ha Yann-Ber Guirieg. Priz : 1000 lur.

-Evit ar re vras :

-Mont d'ober **ski-bale** en ur vro kaer eston (okitania, 1450 m. Uhelder). Eus ar 16 betek ar 24 a viz C'Hwevrer. Un nebeud plasoù a chom c'hoazh, hastit afo ! (degemeret e vo ar vugale hep o zud gant ma vint kosoc'h eget 9 bloaz).

**Saozneg** gant Farid Livsey ha Mai Hughes, **Yoga** gant Tremeur Bourles, **Imboudiñ** (e Perros) gant Dominique ha Gireg Konan.

Kregiñ a raio ar stajoù d'ar **Sadorn 2 a viz Meurzh** da 2 eur, hag echuiñ a raint d'ar **Sul 3 a viz Meurzh** da 5 eur noz. Priz : 250 lur ar staj.

Titouroù digant An Oaled 29870 Treglonou ☎ 98 04 07 04.

## Gouel ar filmoù keltiek

18/22/03/1991

An 12mh féis eadarnaiseanta Film is Telebhisein 'sna titean Ceilteach/12vet gouel ar filmoù etrekeltiek a vo dalc'het en **Inverness (bro Skos)** eus an 18 d'an 22 a viz **Meurzh 91**. Titour : Culloden Centre, Keppoch Road, Culloden, INVERNESS W12LL (bro Skos).

## Deskit brezhoneg e kreiz Breizh

Klas glas ar Chapel Nevez a aozo ur staj brezhoneg komzet eus ar 25 a viz C'Hwevrer betek an 3 a viz Meurzh 91.

Pal : lakaat ar re o deus kroget da zeskiñ brezhoneg da vont war-raok dre gomz ar yezh.

Priz : 1200 lur gant pep tra : kentelioù, boued, lojeiz (gant palennoù, liñselioù, breliñsadennoù). 850 lur evit studierien, skolidi, tud dilabour.

Skrivit da **KLAS GLAS**, 5, hent an dachenn sport, 22160 AR CHAPEL NEVEZ. ☎ 96 21 66 27.

## Beaj e Kembre

Gant Dalc'homp Soñj, kevredigezh evit studi Istor Breizh, e vo aozet div vaaj e 1991, gant harp ar Brittany Ferries. -Adalek an 20 betek an 28 a viz Ebreil, heñchet gant ar gevredigezh Breizh-Kembre, dizoleiñ Kembre, hec'h istor, he sevenadur, he yezh, hec'h ensavadurioù, he finvidigezhioù.

-Adalek ar 7 betek an 19 a viz Mae, gant harp an National Trust for Scotland, dizoleiñ Bro-Skos, he glad istorel ha naturel.

Titouroù digant Dalc'homp Soñj, BP 251, 56102 An Oriant Cedex, ☎ 97 85 22 01.

(brezhoneg gant Bremañ).

## UN DEVEZH-STUDI

Gant ar greizenn "Breizh-Broioù Keltiek"

### Skol-Veur Breizh-Uhel - Roazhon

Ar Gevrenn Brezhoneg ha Keltiek hag ar greizenn enklask "Breizh - Broioù Keltiek" a zo stag outi a aozo un devezh studi asambles d'an 9 a viz C'hwevrer a zeu. Kinniget eo an devezh labour-mañ, da gentañ holl, d'ar studierien o deus lakaet o anv evit an D.E.A. "Istor meneg keltiek" koulz ha d'ar re a zo oc'h ober klaskerezh e darempred gant ar greizenn enklask. Digor bras eo ar vodadeg, evel-just, da gement hini a zo troet gant an danvez brezhonek ha keltiek.

Er Gevrenn Brezhoneg ha keltiek e vo dalc'het abadennoù labour ar **Sadorn 2 a viz C'Hwevrer** : er sal D 421 e laez ar savadur D. Pemp pennad-kaoz a zo vezañ, gant un diviz war-lerc'h pep hini :

- 9.00 : Jean-Yves URIEN "An Diskouezañ".
- 10.00 : Yvon GOURMELON "Kudennoù yezhoniel an divezhegezh brezhoneg-galleg".
- 14.00 : Francis FAVEREAU "Rummadoù brezhonegerien ar c'hantved-mañ".
- 15.00 : Gwenole AR MENN "Anvioù-badez hag anvioù familh".
- 16.00 : Lukian KERGCAT "Normalizadur doare-skrivañ an anvioù-lec'h".

*E brezhoneg e vo labourer dreist-holl e-doug an devezh studi-mañ.*

Daou zevezh labour all a zo da vezañ ac'hann da fin ar bloavezh skol-veur : d'ar 6 a viz Ebreil (lennegezh) ha d'an 18 a viz mae (sevenadur).

## BEAJ STUDI E BRO EUSKADI

Kinniget gant U.G.B. ha Skol-Uhel Bro-Euskadi Norz eus al Lun 18 betek ar Gwener 22 a viz C'Hwevrer 1991

Disparti gant ur c'harr boutin, eus Skol Sonerezh ha Dañsoù Breizh Sant-Matilin, e **Plañvour** (e-kichen An Oriant), d'al Lun 18 a viz C'Hwevrer 1991, da 10 eur (degas ur verenn yen).

Distro d'ar Gwener 22, war-dro eizh eur da noz e **Plañvour**.

Lojeiz-predoù e keriadenn-vakañsoù an Tiegezhioù Anglet (Euskadi Hanternoz). Kampeier evit un den e-unan pe lojeiz bihan evit daou bried.

Priz : 1000 lur (beaj, lojeiz, boued, h.a.).

**Danvez** : studiet e vo an holl gudennoù a den da gelennouriezh an euskareg, er skolioù hag er gevredigezh. Kejet e vo gant SEASKA, IKAS BI, EUSKAL AZIAK, h.a. An ardivinkoù pedagogel, an teknikoù selled-ha-kleved, an embann, al levrioù-skol hag ar re all, an hentenoù kelenn. Beilhadeg Kandaldi - un devezh en Euskadi SU - gweladennoù a bep seurt.

Enskrivadur ha titouroù : Yannig Baron - Kergouareg - 56400 BRECH - ☎ 97 24 57 67. Kas ur chekenn 500 lur dre zen evit an enskrivadurioù.